

C'HORIVA

ANTON TCHEC'HOV

AN OURZ

AR GOULENN-EURED

troet

gant Roparz Hemon

SKRID 51 1988

*Kommandi da 341d evit nivernin : 60,00 lit da vezan kaset
da : Denez, Rt. Ploze 29100 Douarnenez*

ANTON TCHEC'HOV

*Ar 341d evit nivernin : 60,00 lit da vezan kaset
da : Denez, Rt. Ploze 29100 Douarnenez*

AN OURZ

*Ar 341d evit nivernin : 60,00 lit da vezan kaset
da : Denez, Rt. Ploze 29100 Douarnenez*

AR GOULENN-EURED

*Ar 341d evit nivernin : 60,00 lit da vezan kaset
da : Denez, Rt. Ploze 29100 Douarnenez*

troet e brezhoneg gant
ROPARZ HEMON

*Ar 341d evit nivernin : 60,00 lit da vezan kaset
da : Denez, Rt. Ploze 29100 Douarnenez*

SKRID
51

Koumanant da *Skrid* evit peder niverenn : 60,00 lur; da vezañ kaset
da : Denez, Ri, Ploare 29100 Douarnenez

ANTON TCHEC'HOV
AN OURZ
AR GOULENN-EURED

troet e brezhoneg gant
ROPARZ HEMON

Skrid niverenn 51

diskleriet hervez lezenn
ti-moulañ prevez
Rener : Gwendal Denez
Ri, Ploare 29100 Douarnenez
© 1988 pep gwir miret strizh

SKRID
21

Priz : 30,00 lur

Ur blijadur e vo d'hol lennerien lenn, troet gant Roparz Hemon, daou
bezh-c'hoari berr farsus gant Anton Tchech'hov: **An Ourz** hag **Ar
Goulenn-Eured**.

Degas a reomp da soñj hon eus bet tro da embann an troidigezhioù-
mañ diwar zorn Roparz Hemon:

*Skrid 48: Carlo Gozzi, Ar Roue Karv, Lope de Rueda, An
Avaloù; Skrid 49: Cervantes, Ar Vatezh Diwallet-Mat hag Ar
C'hloareg Sorser, Plautus, Ar Podad Aour; Skrid 50: A.O. Roberts,
Ar C'houlmoul a Dec'h, T.C. Murray, Nevez-Amzer.*

An Ourz

Anton Tchech'hov

An Ourz a zo unan eus ar rummad pezhioù-c'hoari berr savet gant **Anton Tchec'hov** (1860-1904) etre 1887 ha 1891.

Ar pezhioù berr-se a zo disheñvel diouzh ar pezhioù o deus graet brud an dramaour rusian dre ar bed, evel Ivanov, Ar Gouelan, An Eontr Vania, Ar Gerezeg, An Teir C'hoar. E-kichen an oberennoù meur-mañ, ne dint, hervez skridvarnerien zo, nemet netraigoù. Disprizet e voent gant Tchec'hov e-unan diwezhatoc'h en e vuhez.

Padal, an netraigoù-se, savet diwar batrom ar c'homediennoù hengounel, implijet enno troioù-micher hengounel da lakaat an arvesterien da fromañ ha da c'hoarzhin, n'int ket hep talvoudegezh. Dudius int, hag e verzer enno dorn ur mestr.

ROPARZ HEMON

TUD AR C'HOARI

Popova, intañvez yaouank ur perc'henn-douar, koant, poullouigoù en he divoc'h

Smirnov, perc'henn-douar a oad etre

Louka, mevel kozh Popova

Sal-degemer an itron Popova, en ur maner war ar maez. Pa sav ar ouel, emañ Popova, gwisket-holl e kañv, peg he daoulagad ouzh ul luc'hskeudenn. He mevel kozh Louka a zo ganti.

Louka (o lenn ar Salmoù a vouezh uhel): Arabat, Itron, arabat! Oc'h en em lazhañ emaoe'h. Ar geginerez hag ar plac'h-a-gambr a zo aet d'ar c'hoad da sivia. N'eus nemet levenez tro-dro. Betek ar c'hazh a oar kemer e blijadur. Emañ o vale er porzh, o labouseta. Ha c'hwi a chom serret e-barzh an ti a-hed an deiz! Koulz e ve deoc'h bezañ en ur gouent! Netra ne ra deoc'h plijadur. Me a gav din n'oc'h ket aet er-maez eus an ti abaoe bloaz, pe dost!

Popova: Ha biken ne din-me er-maez! Perak e rafen? Echu eo va buhez. Emañ en e vez. Me ivez a zo en ur bez, etre peder moger! Marv omp hon-daou.

Louka: Atav ar memes kaoz! Atav e rankan selaou ar memes randonenn! Ho kwaz a zo marv. Bolontez Doue bezet graet, ha Doue d'e bardono! Bet oc'h e kañv. Se a oa dereat. Mes bremañ eo poent ehanañ. Ne c'hellit ket kañvañ ha dougen dilhad du ho puhez-pad. Me ivez a zo marv va gwreg diganin. Ha goude? Gouelet em eus, glac'haret on bet e-pad ur miz pe zaou. A-walc'h eo, me 'gred. Chom da hirvoudiñ evel Jeremias betek va huanad diwezhañ? Re e vefe evit unan evel va hini gozh? (*Huanadiñ a ra*) Lezet hoc'h eus hoc'h holl amezien a-gostez. Ne dit ket da welout anezho, ha ne fell ket deoc'h e teufent d'ho kwelout. Emaomp amañ evel kevnid, — resped deoc'h — atav o

kuzhat diouzh goulou an deiz. Lifleoù ho mevelien a zo krignet gant al logod. Tud a zoare a zo er vro-mañ koulskoude. E-leizh anezho. Du-hont e kêr ez eus ur rejimant. Ma welfec'h an ofiserien, ne vec'h ket evit dispegañ ho taoulagad diouto. Bep Gwener ez eus dañsoù, ha bemdez muzik, a lavarar, gant sonerien ar rejimant. Itron! Itron gaezh! Yaouank oc'h, koant, leun a yec'hed. Tennit mad eus ho puhez, kement ha ma c'hellit. Kened ne bad ket bepred, evel ouzoc'h. A-benn dek vloaz ac'han e fello deoc'h pompadiñ dirak an ofiserien, rodal evel ur paun. Mes re ziweczhat e vo!

Popova (groñs): Difenn a ran ouzhoc'h komz din evel-se! Gouzout a rit ervat n'eus mui a vuhez evidon abaoe ma'z eo marvet va fried. Kredif a ra deoc'h marteze ez on bev. Met faziet oc'h. Touet em eus dougen va dilhad intañvez atav, chom hep sellout ouzh goulou an deiz ken na ziskennin em bez. Kompren a rit? Ra welo e ene eus ar bed all pegement e karan anezhañ!... Ya, me 'oar, c'hwi a lavaro e oa alies pizh, kriz em c'heñver... ha zoken displeal. Hogen me a vo leal betek fin va amzer, dezhañ da welout penaos e c'hallan karout. Eus ar bed-hont e welo ac'hanon dres evel ma oan a-raok ma varvas.

Louka: E-lec'h kaozeal evel-se, e tlefec'h mont da ober un dro el liorz, pe c'hoazh lakaat sterniañ Tobiaz ha Galez ouzh ar c'harr ha mont da welout hoc'h amezeien.

Popova (o ùfronkañ): O va Doue!

Louka: Itron! Itron gaezh! Doue d'ho miro! Petra 'c'hoarvez?

Popova: Tobiaz oa ar marc'h a gare muiañ! Atav e lakae sterniañ anezhañ ouzh ar c'harr hag e vlenie anezhañ e-unan pa'z ae da welout an amezeien. Pebezh blenier dispar e oa! Pegen brav e ouie sachañ war ar rañjennoù gant e holl nerzh! Sofij hoc'h eus? Tobiaz! Tobiaz! Louka, lavarit d'ar baotred-varchosi reiñ dezhañ hiziv ur sac'had kerc'h ouzhpenn.

Louka: Hag e rin, Itron.

Klevout a reer unan bennak o sachañ kreñv war gloc'hig an nor.

Popova (o skrijañ): Piv 'zo o tont? Lavarit ne fell din gwelout nikun.

Louka: Hag e rin, Itron.

Louka a ya kuit.

Popova (hec'h-unan, o sellout ouzh al luc'hskeudenn): C'hwi a welo, Nikolaz, penaos e c'hallan karout ha pardonif. Va c'harantez a varvo pa ne lammo mui ar gwad em c'halon paour. *(Etre c'hoarzhin ha leñvañ)* N'hoc'h eus ket a vezh? Ha me ur wregig vat, ur wregig leal,

o chom amañ serret, pell diouzh ar bed, feal ouzhoc'h keit ha ma vevin! N'hoc'h eus ket a vezh, kofeg bihan? Sofij hoc'h eus, penaos hoc'h eus touellet ac'hanon, chikanet ac'hanon, dilezet ac'hanon e-pad sizhuniou hed-ha-hed!

Louka a zeu tre, strafuilhet.

Louka: Itron, un den a zo aze. Fellout a ra dezhañ gwelout ac'hanoc'h.

Popova: N'hoc'h eus ket lavaret dezhañ ne welan nikun abaoe marv va fried?

Louka: Eo. Mes ne fell ket dezhañ selaou. Lavarout a ra e rank gwelout ac'hanoc'h abalamour d'ur gefridi a bouez.

Popova: Ne welan den ebet.

Louka: Se am eus lavaret dezhañ. Un diaoul a zen eo hennezh. Ne ra nemet touif. Poulzet en deus ac'hanon. Emañ er sal-debrif.

Popova (o vrouezañ): Mat, grit dezhañ dont amañ. Na diseven eo an dud-se!

Louka a ya kuit.

Na kasaus int! Peseurt ezhomm o deus da zont da'm direnkañ? Da strafuilhañ peoc'h va c'halon? *(Huanadiñ a ra)* Ya, me a gav din e rankin mont en ur gouent. *(O prederiañ)* ...ur gouent.

Louka a zeu tre gant Smirnov.

Smirnov (en ur zont tre, da Louka): Diod ma'z out! Teod hir! Azen! *(O welout Popova, e kemer un doare dereatoc'h)* Itron, an enor am eus da reiñ deoc'h va anv va-unan: Smimov, perc'henn-douar, letanant kanolier e retred. Ret eo bet din dont d'ho tirenkañ. Un afer vras eo.

Popova (hep kinnig he dorn): Petra a fell deoc'h?

Smirnov: An enor am boa da anaout ho pried, Doue d'e bardono. Pa'z eo marvet, e oa dleour din a zaouzek mil roubl war zaou vilhed-eskemm. Warc'hoazh e rankan paeañ arc'hant e Ti-Bank al Labour-Douar. Hag-eñ e ve ho madelezh, Itron, paeañ din ar pezh a zo dleet din ganec'h, hiziv?

Popova: Daouzek mil?... Ha perak e tlee va fried an arc'hant-se deoc'h?

Smirnov: Prenet en doa kerc'h diganin.

Popova (o huanadiñ, da Louka): Arabat disoñjal, Louka, lavarout d'ar baotred-varchosi reiñ ar sac'had kerc'h-se da Dobiaz.

Louka a ya kuit.

(Da Smirnov) Mar doa arc'hant dleet deoc'h gant va fried, e vo paeet an dle ganin, evel just. Met, digarezit ac'hanon, n'eus ket arc'hant a-walc'h en ti hiziv evit ho paeañ. Goude warc'hoazh e tistroio va

merour eus kêr, hag e lavarin dezhañ ober kement a zo ret. Ac'han di ne c'hallan ober netra. Hiziv, Aotrou, ez eus seizh miz dres abaoe marv va fried, ha kompren a rit n'on ket evit soñjal en aferioù arc'hant.

Smirnov: Ha me n'on ket evit soñjal e netra nemet en aferioù arc'hant. Ma ne bacan ket an ti-bank warc'hoazh e vin rivinet. Va douaroù a vo lakaet e gwerzh.

Popova: Goude warc'hoazh e vo roet deoc'h an arc'hant.

Smirnov: Hiziv eo e rankan kaout anezho, ha n'eo ket goude warc'hoazh.

Popova: Va iskuzit, n'on ket evit paeañ hiziv.

Smirnov: Ha me n'on ket evit gortoz.

Popova: Petra a c'hallan-me ober? N'emañ ket an arc'hant ganin.

Smirnov: N'oc'h ket evit paeañ?

Popova: Nann, n'on ket.

Smirnov: Ho ker diwezhañ eo?

Popova: Ya, va ger diwezhañ.

Smirnov: E gwir?

Popova: E gwir.

Smirnov: Bennozh Doue deoc'h! Setu un dra lavaret sklaer! (*Hejañ a ra e skoaz*) Ha c'hoazh e rankan chom sioul! Pa edon o tont amañ, ez on en em gavet gant paotr an tailhoù. "Perak oc'h-c'hwi atav imoret, Smimov?" en deus goulennet ouzhin. Me a garfe o defe an dud un tamm poell. Penaos e c'hallan-me chom sioul? Ezhomm am eus arc'hant. Aet on dec'h eus ar gêr da c'houlou-deiz evit gwelout va dleourien. Ha krediñ a rafec'h? Hini ebet anezho, hini ebet n'en deus roet din ur c'hopek. Skuizh-marv oan. Tremenet em eus an noz en un toull, ul lastez tavarn dalc'het gant ur Yuzev, em gourvez e-tal ur varrikenn-vodka goull. Neuze on deuet amañ, tri-ugent verstad diouzh va zi, en esper kaout ar pezh a zo dleet din. Hag e kavan un itron ha n'eo ket "evit soñjal en aferioù arc'hant"! Ha souezh eo e ven imoret?

Popova: Me a gav din em eus diskleriet fraezh an traoù evel m'emaint. Pa zistroio va merour eus kêr ho po hoc'h arc'hant.

Smirnov: D'ho kwelout-c'hwi on deuet, ha n'eo ket da welout ho merour. Sapre diaoul! — resped deoc'h — perak lakaat ho merour en afer?

Popova: Ho tigarez, Aotrou. N'on bet boazet da glevout seurt langaj. Ne

selaouin ket pelloc'h.

Popova a ya kuit.

Smirnov (chomet e-unan): Se zo brav! Ne c'hell bezañ chalet gant "aferioù arc'hant". He gwaz a zo marvet seizh miz zo! Ha me a rank paeañ an ti-bank. Ya pe nann? Paeañ an ti-bank. Ho kwaz a zo marv, Itron. Rannet eo ho kalon. Kompren a ran... Fidorienn! Ho merour a zo aet kuit. Ra yelo gant an diaoul! Ha Petra a rin-me? Tec'hout en ur baloñs diouzh va c'hredourien? Frigasañ va fenn ouzh ar voger? Va dleourien? Unan n'emañ ket er gêr! Unan a zo aet da guzhat! Unan a dabut ouzhin, ha tost on da stlepel anezhañ dre ar prenestr! Unan a zo gant ar boan-gof! Hag houmañ ne c'hell ket bezañ chalet gant aferioù arc'hant! N'eus ket unan a fell dezhañ paeañ! Ha kement-se, abalamour m'on re vat, re laosk, re dener va c'halon, ur yar c'hlebiet! Div wech re habask! Mat! Gortozit! Me 'zo 'vont da ziskouez deoc'h! Ne vin ket touellet ganeoc'h, diaoulez ma'z oc'h! Menel a rin amañ! Ne voutjin ket, keit ha ne vin ket bet paecet ganeoc'h! Mont a ran sot gant ar gounnar! Krenañ a ran gant an droug a zo ennon! N'on ket evit tennañ va anal ken! Va Doue! Emaon o vont da semplañ! (*Huchal a ra*) Te aze, deus amañ!

Louka a zeu tre.

Louka: Petra a fell deoc'h?

Smirnov: Degas din ur banne bier, pe ur banne dour!

Louka a ya kuit.

Ha sellit! Ha klaskit kompren! Un den a rank kaout arc'hant, staget ar gordenn en e gerc'henn, ha prest da stardañ. Hag hounnezh ne baeo ket. N'emañ ket e-tailh da soursial gant aferioù arc'hant! Skiant-vat ar merc'hed, me 'lavar deoc'h! Gwelloc'h azezañ war ur varrikennad poultr-kanol eget rankout prezeg gant ur vaouez! Skrijus! An tammig gast-se a laka va gwad da virviñ gant an araj! A-walc'h da'm daoulagad parañ war ur bompinnenn faro evel hounnezh, zoken a-bell, hag e tarzhan gant ar fulor, ken e sko ar c'hlaz em divesker! Krial a rafen evit goulenn sikour!

Louka a zeu tre, o tegas ur werennad dour.

Louka: An itron n'emañ ket war he zu. Ne c'hell gwelout nikun.

Smirnov: Kae kuit!

Louka a ya kuit.

N'emañ ket war he zu! Ne c'hell gwelout nikun! Mat! Mat! N'hoc'h eus ket ezhomm da welout ac'hanon. Chom a rin amañ ken na vin

paet. Mar chomit klañv e-pad ur sizhun, e chomin e-pad ur sizhun. Ha mar chomit klañv e-pad ur bloaz, e chomin e-pad ur bloaz. M'hen talvezo deoc'h, Itron vat! Ha ne vin ket teneraet gant ho tilhad-kañv na gant ar poullouigoù en ho tivoc'h kuilh. Disfiziañs am eus ouzh ar merc'hed a zo poullouigoù en o divoc'h. (*Huchal a ra dre ar prenest*) Semion, distem ar c'hezeg! N'omp ket prest da loc'hañ! Me a zo o chom amañ! Lavar d'ar baotred-varchosi reiñ kerc'h d'ar c'hezeg! Sell 'ta, amprevan, ar marc'h kleiz a zo rouestlet e dreid er rañjennoù adarre! (*O trevezañ e baotr-karr*) O, se ne ra seurt, Aotrou... Me a baeo ac'hanout evit ober netra! (*Distreiñ a ra er gamb*) Foei, tomm-poazh eo! Den ebet ne bae e zle! Kousket em eus diblaen! Hag an tammig intañvez-se hag he froudennoù! Poan-benn am eus. Ur banne vodka ne rafe ket a zroug din. (*O huchal*) Te aze!

Louka a zeu tre.

Louka: Petra 'zo?

Smirnov: Degas din ur banne vodka.

Louka a ya kuit.

Ac'h! (*Azezañ a ra ha sellout outañ e-unan*) Me 'zo paotr brav! Poultrennek va dilhad, lous va botoù! Na gwalc'het na kribet! Tammoù plouz war va jiletenn! N'eo ket souezh on bet kemeret evit un ampouailh gant an itron vihan. (*Bazailhat a ra*) N'eo ket gwall seven dont e sal-degemer an itron evel-se. Ne vern. N'on ket deuet amañ d'ober prespolite. Ur c'hredour on, o tont da c'houlenn pezh a zo dleet dezhañ. Ha n'eo ket ret d'ur c'hredour bezañ gwisket-kran.

Louka a zeu tre gant ar vodka.

Louka: Dibalamour oc'h, Aotrou.

Smirnov (gant imor): Petra 'lavarez?

Louka: O... netra... Ne raen nemet...

Smirnov: Ouzh piv emaoût o komz? Serr da c'henou!

Louka (a-gostez): Pebezh loen! Pebezh ampoezon! An diaoul eo, me 'gred, en deus kaset anezhañ amañ.

Louka a ya kuit.

Smirnov: Mougafi a ran gant ar gounnar! Frikañ a rafen ar bed-holl e tammoù munut! Emaon o vont da semplañ! (*O huchal*) Te aze!

Popova a zeu tre, soublet he daoulagad.

Popova: Aotrou, abaoe pell n'em eus ket klevet mouezhioù tud o tont da'm direnkañ em digenvez. N'on ket evit gouzañv e ve huchet em divskouam evel-se. Me ho ped hag hoc'h asped, na strafuilhit ket

peoc'h va ene.

Smirnov: Paeit ho tle, hag ez int kuit.

Popova: Lavaret em eus deoc'h ken fraezh ha ma c'hallen n'eus ket arc'hant a-walc'h en ti-mañ evit ar mare. Gortozit betek goude warc'hoazh.

Smirnov: Gant ar vrasañ doujañs em eus lavaret deoc'h, ken fraezh ha ma c'hallen, e rankan kaout va arc'hant hiziv end-eeun. Ma ne baeit ken hiziv, en em grougin warc'hoazh.

Popova: Penaos e c'hallfen-me reiñ deoc'h arc'hant, pa n'em eus ket?

Smirnov: Ne fell ket deoc'h paeañ?... Ne fell ket deoc'h?

Popova: Ne c'hallan ket.

Smirnov: Neuze e chomin amañ. Chom a rin amañ da c'hortoz va arc'hant. (*Azezañ a ra*) Goude warc'hoazh e vin paet, emezoc'h! Mat! Chom a rin azezet amañ betek goude warc'hoazh. Azezet amañ, evel m'emaon bremañ. (*Sevel a ra en ul lamm*) Lavaret em eus deoc'h e rankan paeañ an ti-bank warc'hoazh! Ha krediñ a ra deoc'h e oa evit farsal?

Popova: Aotrou, na gomzit ket ken uhel, mar plij. N'emaomp ket en ur marchosi.

Smirnov: Ne c'houlennan ket pelec'h emaoamp, en ur marchosi pe en un ti. Goulenn a ran: ha ret eo din paeañ an ti-bank warc'hoazh, ya pe nann?

Popova: N'ouzoc'h ket en em zerc'hel dereat dirak un itron.

Smirnov: Eo, me 'oar.

Popova: N'ouzoc'h ket. Un den rust ha diseven a zo ac'hanoc'h. Tud a-zoare ne gomzont ket evel-se ouzh un itron.

Smirnov: Se zo souezhus! Ha penaos e fell deoc'h e komzen ouzhoc'h neuze? E galleg, moarvat. (*Hegaset, en ur ober orbidoù*) Madame, je vous prie... Nag ur blijadur evidon gouzout n'em bo ket va arc'hant... Ho tigarez a bedan evit ho tirenkañ... Na brav an amzer hiziv! An dilhad-kañv a zougit a zo diouzhoc'h, ur bam! (*Stouiñ a ra dirazi ha lakaat e seulioù da stlakañ an eil ouzh egile.*)

Popova: Ho komzoù a zo dizoare, ha n'int tamm ebet speredek.

Smirnov (ouzh he drevezañ): Dizoare, tamm ebet speredek! N'ouzon ket penaos en em zerc'hel dirak un itron! Itron vat, gwelet em eus em buhez muioc'h a verc'hed eget n'hoc'h eus gwelet a laboused. Teir gwech on en em gannet abalamour da verc'hed. Kaset em eus daouzek da satal, ha kaset on bet da satal gant nav. O ya! Amzer 'zo e oan diot,

e oan sot gant ar merc'hed. Meuleudi a raen dezho, ha pa raen va gourc'hemennoù e stouen izel dirazo. Klafñ e oan gant ar garantez. Gouzañv a raen. Huanadiñ a raen d'al loar. Krenañ a raen, koll liv a raen, kridiennañ a raen a bep eil. Kouezhañ a raen e karantez gant holl nerzh va ene, evel un diskiant, hag e pep giz. Betek prezeg a-du gant frankiz ha gwirioù ar merc'hed! An hanter eus va danvez a zo aet gant seurt furlukinerzh... Bremañ, avat, echu! Ne vin mui paket! A-walc'h a zaoulagadoù du, a zaoulagadoù tan, a vuzelloù ruz, a zivoc'hoù kuilh, poullouigoù eno pe get! A-walc'h a guzuligoù, a zerc'hel war hoc'h anal, a valeadennoù ouzh skleur al loar! Nann, Itron, ne rofen mui daou wenneg evit kement-se. Ne lavaran ket se evidoc'h, met an holl verc'hed gwitibunan, yaouank ha kozh, a zo orbidus, touellus, bepred o vegata hag o livañ gevier. Fougeüs int, speredet-strizh, didruez, treuzvarmus, hag amañ (*o skeiñ ouzh e dal*), va digarezit, n'eus ket ul labous n'en defe dek gwech muioc'h a boell egeto. Ur paotr a sell ouzh ur goantenn, stipet e mofselin, mistr, beuzet en ur bed a huñvre, un doueez, hag ar paotr kaezh a chom bamet, mezezevellet ur milion a wechoù. Ra sello avat en he speredhi, hag e kavo... un azen! (*Kregiñ a ra e kein ur gador, a strak hag a dorr*) Met ar pezh a ra din mont en egar eo gwelout an azen-se o faltaziñ, n'ouzon ket perak, n'eus hini all ebet en deus ar gwir, a zo gouest, dre n'ouzon ket peseurt galloud ispisial, da garout! Ra vin krouget penn d'an traoñ ouzh an tach-hont mar gell ur vaouez karout netra en he buhez, nemet ur c'hi-loullik e ve! Ha pa seblant karout ur paotr, ne oar ober netra nemet klemmichal. Ar paotr a c'houzañv hag a aberzh pep tra eviti. Hi, da ziskouez he c'harantez, a skub al leur gant he brozh hag a glask muiañ ma c'hell kas ar paotr dre ar fri. C'hwi, Itron, siwazh deoc'h, a zo ur vaouez, hag a oar petra a zo e kalon ur vaouez. Lavarit din neuze, lavarit din hep distro, hag anavezet hoc'h eus biskoazh ur vaouez a ve eeun, leal, feal e gwirionez? Evel just, n'hoc'h eus ket. N'eus nemet ar merc'hed kozh ha divalav a van leal ha feal. Kavet e ve buanoc'h ur c'hazh komek eget ur vaouez a zalc'h d'he c'harantez.

Popova: Pardonit ac'hanon, met piv neuze a zo leal ha dalc'hus en e garantez? N'eo ket ar paotr, a dra sur!

Smirnov: Eo, ar paotr, sur-mat!

Popova: Ar paotr! (*C'hoarzhin a ra, imoret*) Ar paotr, leal ha dalc'hus en garantez! Pebezh nevezinti! (*Fromet*) Peseurt gwir hoc'h eus da

lavarout kement-se? Ar baotred, dalc'hus ha leal! Eus an holl baotred am eus anavezet, va gwaz, Doue d'e bardono, a oa ar gwellañ. Karet em eus anezhañ gant va holl nerzh, gant va holl ene, evel ma c'hell ober ur plac'h yaouank, zoken ur plac'h skiantek. Roet em eus dezhañ va buhez, va yaouankiz, va eürusted, va danvez. Ne veven nemet evitañ. E azeuliñ a raen, e-giz ma'z azeul ur baganez un doue... Ha... soñjit!... An den-se, ar gwellañ eus ar baotred, a douelle ac'hanon bep tro ma c'halle hep an disterañ morc'hed! Goude e varv em eus kavet en e diretenn, leun-kouch a lizheroù a garantez en e daol-skrivañ! P'edo e buhez, — skrijañ a ran netra nemet o soñjal —, ez ae kuit diouzhin, ouzh va lezel va-unan e-pad sizhunvezhioù. Ober a rae al lez da verc'hed all dirak va daoulagad, hag e oa difeiz em c'heñver. Dispign a rae va arc'hant. Goap a ra din zoken, peogwir e karen anezhañ. Ha gwir, karout anezhañ a raen en desped da bep tra. Me a oa leal. A zo muioc'h, leal e choman atav. Emaon amañ, etre mogerioù an ti-mañ, evel en ur bez. Hag amañ e chomin da viken! An dilhad-kañv-mañ a zougin betek an deiz ma varvin!

Smirnov (*o c'hoarzhin diwar fae*): Dilhad-kañv! Evit piv 'ta e kemerit ac'hanon? Me 'oar perak e tougit ar gwiskamant meurlarjez-se, ha perak en em serrit etre peder moger. Na misterius! Na barzhonius eo kement-se! Ma teufe un deskardig eus skol an ofiserien, pe ur barzhig sot da dremen e-biou d'an ti-mañ, e savfe e zaoulagad etrezek ho prenester, hag e soñjfe: "Aze emañ an intañvez a van etre peder moger, evel en ur bez, dre garantez ouzh he fried!" Astrafoù, me 'lavar deoc'h!

Popova (*broudet*): Petra! Krediñ a rit komz ouzhin evel-se!

Smirnov: En em serrif a rit en ur bez. Met n'hoc'h eus ket disoñjet lakaat poultr war ho fri!

Popova: Me!... Krediñ a rit bezañ ken difeson em c'heñver!

Smirnov: Arabat choual! Me n'on ket ho merour. Me a lavar an traoù evel m'emaint. N'on ket ur vaouez, ha n'on ket kustum da glask pemp troad d'ar maout. N'eus ket ezhomm choual.

Popova: C'hwi eo, Aotrou, a gomz re uhel, n'eo ket me eo. Lezit ac'hanon e peoc'h, mar plij.

Smirnov: Roit din va arc'hant hag ez in kuit.

Popova: N'ho po netra diganin.

Smirnov: Eo!

Popova: N'ho po ket ur c'hopek diganin, netra nemet evit chifañ

ac'hanoc'h. Lezit ac'hanon!

Smirnov: N'em eus ket ar blijadur da vezañ ho kwaz, nag ho tanvez-pried ivez. N'hoc'h eus ket ezhomm eta d' ober ho penn fall dirazon. (*Azezañ a ra*) Ne gavan ket an dra-se brav.

Popova (o fuc'hañ): Hag e kredit azezañ!

Smirnov: Ya.

Popova: Me a lavar deoc'h mont kuit.

Smirnov: Roit din va arc'hant. (*A-gostez*) Ne badan ket gant ar gounnar.

Popova: Me ne fell ket din kaozeal gant un den dibalamour eveldeoc'h. Kit kuit diouzh an ti-mañ.

Smirnov: Nann.

Popova: Nann?

Smirnov: Nann.

Popova: Mat neuze!

Sachañ a ra war ar c'hloc'h. Louka a zeu tre.

Louka, lakait an aotrou-mañ er-maez!

Louka (o tostaat ouzh Smirnov): Aotrou, ho pezet ar vadelezh da vont kuit, evel a lavar an itron. Arabat deoc'h...

Smirnov (o sevel en ul lamm): Serr da c'henou! Ouzh piv emañ o komz? Gortoz ma vo friket da eskern!

Louka (o lakaat e zorn war e vruched): Sent ar Baradoz!... (*Kouezhañ a ra war ur gador-vrec'h*) Va nerzh a ya diouzhin!... N'on mui evit tennañ va anal!... Mont a ra berr warnon!

Popova: Pelec'h emañ Deniel? (*O huchal*) Deniel! Deniel! Paol! Deniel! (*Sachañ a ra war ar c'hloc'h.*)

Louka: Aet... int holl... da glask... sivi... N'eus den er gêr... Semplañ a ran... Dour din!

Popova (da Smirnov): Mar plij, it er-maez eus an ti-mañ.

Smirnov: Mar plij, bezit seven.

Popova (he daouarn serret, o skeiñ he zroad er plañchod): N'oc'h nemet ur palod! Un ourz! Ur mastin! Ul loen-mut!

Smirnov: Petra 'lavarit?

Popova: Lavarout a ran n'oc'h nemet un ourz! Ul loen-mut!

Smirnov (o tostaat outi): Ho tigarez! Peseurt gwir hoc'h eus-hu da lavarout vilonioù din?

Popova: Ya, me a lavar vilonioù deoc'h! Ha goude? C'hwi a gav deoc'h am eus aon?

Smirnov: Ha c'hwi a gav deoc'h, peogwir ez oc'h ur vaouezig a varzhoniezh hag a hufivre, e c'hellit kunujenniñ ur gwaz hep kastiz? Ho tichekañ a ran!

Louka: Aotrou Doue!... Sent ar Baradoz!... Dour din!

Smirnov: Pistolennoù!

Popova: Ha krediñ a ra deoc'h, peogwir hoc'h eus daouarn evel morzholioù hag e vlejtit evel un tarv, em eus aon razoc'h? Krediñ a rit an dra-se, mastokin?

Smirnov: Ho tichekañ a ran! Ne lezan den ebet da zismegañsiñ ac'hanon! Ha goude n'oc'h nemet ur vaouez, dister he nerzh, ne ran forzh!

Popova (o krial kreñvoc'h egetañ): Ourz! Ourz! Ourz!

Smirnov: Poent eo deoc'h kompren n'eo ket hepken ar wazed a rank paeañ an dismegañs a reont ouzh ar re all! Ar merc'hed o deus kement a wirioù hag ar wazed, emezoc'h! Mat! Ho tichekañ a ran neuze, evel pa vefec'h ur gwaz!

Popova: C'hoant hoc'h eus en em gannañ? En em gannañ a raimp!

Smirnov: Deomp dezhi! Diouzhtu!

Popova: Diouzhtu! Va fried en doa pistolennoù. Da gerc'hat anezho ez an. (*Mont a ra kuit, mall warni, ha distreiñ raktal*) Nag a blijadur a ray din lakaat ur voled en ho penn kalet! Ha kas ac'hanoc'h d'an ifem!

Popova a ya kuit.

Smirnov: Dao! Me a lazho anezhi evel ur poñsin! N'on mui yaouank-flamm, n'on mui tener. Foei war ar merc'hodennoù!

Louka: Aotrou, me ho ped! (*O taoulinañ dirak Smirnov*) Bezit madelezhus! Ho pezet truez ouzh un den kozh! It kuit! Mervel a ran gant an aon! Ha bremañ e fell deoc'h en em gannañ!

Smirnov (hep teurel pled outañ): En em gannañ! Ar merc'hed a zo digabestr bremañ! Kement a wirioù o deus hag ar wazed! Dre se em eus ar gwir da lazhañ anezhi, hag e rin!... Pebezh maouez! (*O trevezañ Popova*) "Nag a blijadur a ray din lakaat ur voled en ho penn kalet!" ...Pebezh maouez! He divoc'h a oa ruz! He daoulagad a flammine! Asantet he deus en em gannañ! Tantad diaoul! Morse n'em eus gwelet unan evel hounnezh!

Louka: Aotrou, it kuit, en anv Doue! Me a bedo evidoc'h betek fin va buhez.

Smirnov: Hounnezh a zo ur vaouez! Me a blij din ar seurt-se! Ur vaouez! Ket ur glemmicherez! Ur vaouez leun a dan, a boultr-kanol, a gurun!

Tost domaj eo e rankan lazhañ anezhi!

Louka (o leñvañ): Aotrou, it kuit!

Smirnov: Hounnezh a zo ur vaouez diouzh va doare! Plijout a ra din!
En desped d'ar poullouigoù-se en he divoc'h, plijout a ra din! N'em
eus ket ezhomm eus an arc'hant! N'on mui fuloret. Ur vaouez dispar!
Popova a zeu tre, pistolennoù ganti.

Popova: Setu amañ ar pistolennoù. Da gentañ avat, diskouezit din
penaos tennañ ganto. N'eus bet pistolenn ebet biskoazh em daouarn.

Louka: Doue! Ho pezet truez ouzhimp holl! Mont a ran da glask al
liorzher hag ar paotr-karr. Petra hon eus-ni graet da vezañ trubuilhet
evel-se?

Louka a ya kuit.

Smirnov (o sellout ouzh ar pistolennoù): An holl bistolennoù n'int ket
heñvel. Bez' ez eus reoù graet a-ratozh evit en em gannañ. Ar re-mañ
a zo deuet ganeoc'h a zo pistolennoù a dri zenn, gant strinkerioù.
Feiz, brav int! Me zo sur o deus koustet dek roubl ha pevar-ugent an
daou re da vihanañ. Ret eo deoc'h derc'hel ar bistolenn evel-se. (A-
gostez) Pebezh daoulagad! Daoulagad da entañ kalon ur gwaz!

Popova: Evel-se?

Smirnov: Ya... Bremañ e savit ar c'hi... Bremañ e vizit evel-se... Ho
penn un tammig a-dreñv... Astennit ho prec'h... Mat eo... Bremañ,
gant ho piz, sachit war an draig-mañ... Graet an taol!... Hogen
arabat koll an Nort! Bizit goustad. Diwallit na grenfe ho torn.

Popova: Kompren a ran. N'eo ket aezet tennañ e-barzh an ti. Deomp el
liorzher.

Smirnov: Deomp! Ret deoc'h avat gouzout e tennin en aer.

Popova: Biskoazh kemend-all! Perak?

Smirnov: Perak? Perak? Ne lavarint ket deoc'h perak.

Popova: Aon hoc'h eus, n'eo ket 'ta? Arabat termal, Aotrou. Deuit
ganin. N'em bo peoc'h ebet ken na'm bo toullet ho tal, an tal-se a
gasaan kement! Aon hoc'h eus?

Smirnov: Ya.

Popova: N'eo ket gwir! Perak ne fell ket deoc'h en em gannañ?

Smirnov: Peogwir... peogwir... e plijit din!

Popova (gant ur c'hoarzh imoret): Plijout a ran deoc'h! Krediñ a ra
lavarout e plijan dezhañ! (O tiskouez an nor gant he biz) Mat! Ho
lezel a ran da vont kuit!

Smirnov a ziskrog diouzh ar bistolenn hep ur ger. Kemer a ra e dog

*ha kerzhout betek an nor. Eno e chom a-sav ur pennad. Sellout a reont
dilavar an eil ouzh egile. Smirnov a dosta outi adarre.*

Smirnov: Selaout! Imoret oc'h c'hoazh?... Me a zo gwall imoret ivez...
Penaos diskleriañ an dra-se?... C'hwi 'wel... Da lavarout gwir...
Setu amañ penaos... (A-bouez e benn) Ha me eo a zo da damall mar
plijit din? (Kregiñ a ra e kein ur gador, a strak hag a dorr)
Boullc'hurun! Perak 'ta hoc'h eus kadorioù brek evel-se en ho ti?
C'hwi a blij din, klevout a rit?... Tost on da grediñ... e karan
ac'hanoc'h.

Popova: Kit pell diouzhin. Kasoni am eus ouzhoc'h!

Smirnov: Pebezh maouez, va Doue! Morse n'em eus gwelet unan evelti
em buhez. Kollet on! Echu eo ganin! Paket on evel ul logodenn.

Popova: Na dostait ket ouzhin! Pe anez e tennan warnoc'h!

Smirnov: Tennit! N'oc'h ket evit gouzout pegen eürus e vin da vervel
gant an daoulagad marzhus-se o sellout ouzhin, da vezañ lazhet gant
ur voled diouzh ur bistolenn dalc'het en dornig-se, ken flour ha
voulouz. Va skiant a zo aet diouzhin. Soñjit ervat. Mar dan kuit
bremañ, biken n'en em welimp mui. Grit ho choaz diouzhtu. Mat eo
va familh. Den onest on. Dek mil roubl leve am eus. Gouest da dizhout
gant ur voled ur c'hopek bannet er vann. Kezeg dispar am eus.
Dimeziñ a raimp?

Popova (taeret o hejañ ar bistolenn): Ho tichekañ a ran! Deomp d'en em
gannañ!

Smirnov: Koll a ran va fenn! Trefuet on! (A-bouez e benn) Te aze, dour
din!

Popova (a-bouez he fenn): Me a lavar: deomp d'en em gannañ!

Smirnov: Va zamm poell a zo aet diganin. Kouezhet on e karantez evel
ur paotrig yaouank, evel un diod! (O kregiñ en he dorn ken ma c'harm-
hi gant ar boan) Karout a ran ac'hanoc'h! (Daoulinañ a ra dirazi)
Karout a ran ac'hanoc'h gwashoc'h eget ma'm eus karet den
biskoazh! Kaset em eus daouzek plac'h da sutal, kaset on bet da sutal
gant nav, mes ne garen hini ebet anezho evel m'ho karan. Aet on sempl
ha dinerzh. Setu me amañ daoulinet dirazoc'h evel un inosant, o
kinnig deoc'h va c'halon. Ur vezh eo! Un dizenor! Pemp bloaz zo
abaoe m'on kouezhet e karantez evit ar wech diwezhañ, a gave din. Ha
kouezhet on adarre, kouezhet er poull betek va gouzoug. Goulenn a
ran diganeoc'h bezañ va gwreg. Ya pe nann? Asantiñ a rit-hu?... Mat!
Ma ne fell ket deoc'h, gwazh a se!

Sevel a ra ha mont buan betek an nor.

Popova: Gortozit!

Smirnov (*a chom a-sav*): Mat?

Popova: Nann, netra!... Kit kuit... gortozit avat... Nann, kit kuit...

Kasaat a ran ac'hanoc'h... Koulskoude... chomit... O! ma c'hallfec'h gouzout pebezh droug a zo ennon! (*O stlepel ar bistolenn war an daol*) Gourt eo aet va bizied gant an dra spontus-se. (*Kregiñ a ra en he mouchoer ha regiñ anezhañ e tammou*) Petra a rit aze? Perak e c'hortozit? Kit kuit!

Smirnov: Kenavo.

Popova: Ya, ya, kenavo. (*O krial*) Da belec'h emaoe'h o vont? ...Chomit... Gwelloc'h deoc'h mont kuit evelato. Ne badan mui!

Nann, nann, na dostait ket! Na dostait ket!

Smirnov (*o vont betek enni*): Mezh am eus! Kouezhañ e karantez evel ur bugel-skol! Daoulinañ dirazi! Skrijañ a ran nemet o soñjal.

(*Teñval e vouezh*) Karout a ran ac'hanoc'h. Ha ne felle ket din. Warc'hoazh e rankan paeañ an ti-bank. Krog omp da foennat er parkeier. Ha c'hwi bremañ, c'hwi war ar marc'had! (*O lakaat e vrec'h en-dro d'he dargreiz*) Se ne bardonin ket din va-unan, biken!

Popova: Kit kuit! Lezit ac'hanon! Kasoni am eus ouzhoc'h! Ho... tichekañ... a ran...

En em vriata a reont, o pokat an eil d'egile. Louka a zeu tre, ur vouc' hal gantañ en e zorn, al liorzher war e lerc'h gant ur rastell, ar paotr-karr gant ur bigell, ha labourerien ganto pep a vataraz.

Louka: Sent ar Baradoz!

Un ehan.

Popova (*souplet he daoulagad*): Louka, ne vo ket ret reiñ kerc'h hiziv da Dobiaz.

Embannet evit ar wech kentañ en *Ar Bed Keltiek*, miz Eost 1965

Ar Goulenn-Eured

Farsadenn en un arvest gant

Anton Tchec' hov

TUD AR C'HOARI

Stepan, perc'henn-douar

Natalia, e verc'h, 25 bloaz

Ivan, perc'henn-douar, amezeg da Stepan,
yac'h-pesk, maget-mat hag imoret-fall

Ar sal-degemer e tu Stepan. Emañ Stepan er sal pa sav ar ouel. Ivan a zeu tre, gwisket-kran, gant manegoù gwenn.

Stepan (*o vont davet Ivan*): Ivan! Va mignon ker! C'hwi eo! Pebezh plijadur! (*Stardañ a ra e zorn dezhañ*) Mat! Nag ur souezh gwelout ac'hanoc'h! Penaos ez a ar bed?

Ivan: Bennozh Doue, Stepan. Ha penaos ez a ar bed?

Stepan: Ganimp amañ ne da ket re fall, a drugarez d'ho pedennoù, moarvat... Azezit, mar plij... Me a gave din ho poa disofijet ac'hanomp, hoc'h amezeien gozh. Met, lavarit din, petra eo an dilhad-se a zo war ho tro? Ur chupenn lost-pig, manegoù, hag all, hag all! Sur hoc'h eus tudjentil vras da welout.

Ivan: Nann, Stepan, va mignon, n'em eus nikun da welout nemedoc'h.

Stepan: Ha perak ar chupenn lost-pig neuze? Daoust hag emañ hiziv deiz kalanna?

Ivan: C'hwi 'oar, Stepan... (*Kregiñ a ra en e vrec'h*) Deuet on da c'houlenn diganeoc'h ober din ur vadelezh... ma n'eo ket ho tirenkañ a ran. Sikouret hoc'h eus ac'hanon en amzer gwechall, meur a wech... Met va digarezit... Strafuilhet on... Me a gemero ur banne dour, ma ne ra netra deoc'h. (*Diskenn a ra dour en ur werenn diouzh ur garafenn a zo war an daol.*)

Stepan (*a-gostez*): Dont a ra da amprestañ arc'hant diganin. N'en devo ket ur gwenneg. (*A vouezh uhel*) E chal gant petra emac'h, va

mignon yaouank?

Ivan: C'hwi 'wel, Stepan, va mignon... Pardonit din... Diaes eo va spered, evel ma welit... N'eus nemedoc'h war an douar a c'hell sikour ac'hanon... Ha koulskoude ne veritan ket... N'em eus ket ar gwir da vezañ sikouret ganeoc'h.

Stepan: Lavarit din petra a fell deoc'h, va faotr. Na chomit ket da dortal.

Ivan: Ya, me a lavaro deoc'h... diouzhtu... Deuet on... da c'houlenn diganeoc'h aotre da zimeziñ gant ho merc'h Natalia.

Stepan (laouen-bras): Ivan! Va mignon Ivan! Lavarit c'hoazh... N'em eus ket klevet mat.

Ivan: An enor am eus da c'houlenn diganeoc'h aotre...

Stepan: Va mignon ker! Ya, evel just... (*E vriata a ra*) Pell 'zo em boa soñjet en dra-se. Ne c'houlennan ket gwell... (*Gant daeroù en e vouezh*) Karet em eus ac'hanoc'h atav evel ur mab, Ivan. Ra viot eürus ho-taou, hag emglev mat etrezoc'h. Atav em eus souetet an dra-se... Met perak e choman amañ, seizet gant al levez, evel un diod? Evel just, Ivan, a galon vat... Ez an da gerc'hat Natalia.

Ivan (fromet-holl): Ha petra a responto, a gav deoc'h? Krediñ a ra deoc'h e vo kontant?

Stepan: Kontant! Dimeziñ gant ur paotr kaer evel doc'h! Klaoustre eo pitilh ganeoc'h! Ez an da lavarout dezhi, diouzhtu!

Stepan a ya kuit.

Ivan (e-unan): Sklaset on. Krenañ a ran evel ur bugel-skol o vont da dremen un armodenn. Ret oa ober un dra bennak. Mar chom un den re bell d'en em soñjal, da gaozeal, da dermal, da c'hortoz ur plac'h yaouank dispar da zont, da gouezhañ e karantez ganti, ne zimezo biken... Sklaset on! Natalia a zo ur plac'h a oar derc'hel un ti. Desket eo. N'eo ket divalav. Petra a c'hallfen goulenn ken? Perak eta on spontet? Badinellañ a ra va fenn. (*Evañ a ra dour*) N'on ket evit chom paotr yaouank, ha me pemp bloaz ha tregont dija... Un oad diaes. Ezhomm am eus da ren ur vuhez sioul, reizhet, kempenn. Atav e vezan oc'h en em chalañ. Sellit! Va muzelloù o taskrenañ, va lagad dehou o tivalvenniñ... Gwashoc'h eo c'hoazh e-pad an noz. Pa vezan em gwele, a-boan gounezet gant ar c'housed, e santan ur pistig em c'hostez, hag e red dre va c'horf betek va skoaz, ha neuze dre va fenn. Lammat a ran evel un diskiant, hag e rankan bale dre va c'hamb. Neuze mont en-dro da'm gwele. Morediñ a ran, ha kerkent, ur pistig adarre! E-giz-se ugent gwech diouzh renk!

Natalia a zeu tre.

Natalia: O! C'hwi eo! Va zad en deus lavaret din e oa un den deuet da bremañ ar varc'hadourezh. Penaos ez a ar bed ganeoc'h?

Ivan: Ha penaos ez a ar bed ganeoc'h, Natalia?

Natalia: Digarezit ac'hanon. N'on ket gwisket evel ma tere. Ha gant va zavañjer! Emaomp o tigliozañ piz. Poent eo lakaat anezho da sec'hañ. Perak oc'h chomet keit amzer hep dont d'hor gwelout? Azezit 'ta.

Azezañ a reont o-daou.

Merrenañ a reot ganimp?

Ivan: Ne rin ket, bennozh Doue deoc'h. Debret em eus.

Natalia: Butuniñ a reot? Alumetez a zo aze... Brav eo an amzer hiziv.

Met dec'h ez eus bet kement a c'hlav ma n'eus bet tu d'ober netra er parkeier. Pet bern foenn hoc'h eus lakaet e-barzh ar c'hrignol? Ha krediñ a rafec'h? Kement a c'hoant am boa da echuiñ al labour ma'm eus lakaet troc'hañ an hanter, ha bremañ em eus keuz. Breinañ a ray, am eus aon. Gwelloc'h e vije bet gortoz. Met lavarit din: perak oc'h gwisket ken kran? Biskoazh kemend-all! O vont da zafisal, pe betra? Me 'gav din oc'h cheñchet, bravoc'h eget a-raok... Perak 'ta oc'h gwisket evel-se?

Ivan (strafuilhet): C'hwi 'wel, Natalia... Divizet em eus goulenn diganeoc'h... Selaout... Souezhet e viot, sur-mat. Droug a savo ennoc'h marteze, met... (*A-gostez*) Na yen eo!

Natalia: Petra eo 'ta?... Petra?

Ivan: Berr-ha-berr... Gouzout a rit, Natalia, em eus bet an enor da anaout ho tiegezh e-pad pell, abaoe amzer va bugaleaj e gwirionez. Va moereb hag he fried, Doue d'o fardono, — heritet em eus o madoù, c'hwi 'oar —, o doa ar vrasañ doujañs e-keñver ho tad hag ho mamm bremañ aet da anaon. Hon tud a zo bet atav mignoned, mignoned tost zoken. Va douaroù, evel ouzoc'h, a zo e-kichen ho re. Pradoù ar Groaz, a zo din, a zo sko ouzh ar c'hoad bezv, a zo deoc'h.

Natalia: Va digarezit da vont war ho kaoz. Pradoù ar Groaz, a lavarit, a zo dimp. Faziñ a rit, a dra sur.

Ivan: Nann, din int.

Natalia: Biskoazh kemend-all! Dimp-ni eo Pradoù ar Groaz.

Ivan: N'int ket, Natalia, Pradoù ar Groaz a zo din.

Natalia: Ar wech kentañ eo din klevout an dra-se. Penaos int deuet da vezañ deoc'h?

Ivan: Penaos? Me a fell din lavarout Pradoù ar Groaz, etre ar c'hoad bezv

hag ar C'heun Losket.

Natalia: Ya, evel just... dimp-ni int.

Ivan: N'eo ket gwir, Natalia. Din-me eo Pradoù ar Groaz.

Natalia: Aet eo ho skiant diganeoc'h? Abaoe pegoulz int deoc'h?

Ivan: Abaoe pegoulz? Atav int bet da'm ziegezh, keit ha ma c'hallan kaout soñj.

Natalia: Pardonit din, met ne gredan ket ac'hanoc'h.

Ivan: N'hoc'h eus nemet sellout ouzh ar paperiù, Natalia. Gwir eo ez eus bet un tammig diemglev gwechall. Met an holl bremañ a oar ez eo din Pradoù ar Groaz. Echu eo an tabut. Diskleriañ a rin deoc'h avat ar pezh a zo c'hoarvezet. Mamm-gozh va moereb he doa roet aotre da gouerien ho tad-kuñv da vont e Pradoù ar Groaz, rak sikour o doa roet dezhi evit poazhañ he brikennoù. Kouerien ho tad-kuñv o deus kemeret ar pleg da vont e Pradoù ar Groaz. Ha neuze ez eus bet al lezennoù nevez...

Natalia: N'eo tamm ebet evel-se eo! Va zad-kuñv ha va zad-kozh a selle atav ar C'heun Losket evel harzoù o douaroù. Pradoù ar Groaz a zo dimp eta. Perak dont da lavarout ar c'hontrol? N'on ket evit kompren perak e rit an dra-se. Hegasus eo.

Ivan: Me a ziskouezo deoc'h ar paperiù, Natalia.

Natalia: Fellout a ra deoc'h ober goap, pe ober an heg din. Se 'zo brav! Un tamm douar a zo bet dimp e-pad tri c'hant vloaz, hag e teuit da lavarout a-greiz-holl ez eo deoc'h! Va digarezit, Ivan, met n'on ket evit krediñ da'm divskouam. Ne ran forzh eus ar pradoù-se, goude holl, ur pemzek devezh-arat, a dalvez tri c'hant roubl d'ar muiañ. Met ar wirionez eo ar wirionez. Komzit kement ha ma karit. N'on ket evit gouzañv ar gaou!

Ivan: Selaouit ac'hanon, me ho ped. Kouerien ho tad-kuñv a rae brikennoù evit mamm-gozh va moereb. Mamm-gozh va moereb, evit diskouez hec'h anaoudegezh-vat...

Natalia: Tad-kuñv, mamm-gozh, moereb! Petra 'ra se din? Ar pradoù-se a zo dimp, setu holl!

Ivan: Ar pradoù-se a zo din!

Natalia: Dimp-ni int! Kaozeal a c'hellit betek warc'hoazh. Lakaat a c'hellit un dousenn chupennoù lost-pig war ho kein mar karit. Pezh a zo dimp a zo dimp. Ne glaskan ket kemer pezh a zo deoc'h, met mirout a fell din pezh am eus. Pe e plij deoc'h pe ne blij ket, e-giz-se emañ!

Ivan: Me n'em eus ket ezhomm eus ar pradoù-se, Natalia. Ar reizh eo a gont evidon. Reiñ a rin anezho deoc'h a galon vat.

Natalia: Me eo a c'hallfe reiñ anezho deoc'h, rak din int. Iskis e kavan an dra-se. Un amezeg mat oc'h bet betek amañ, ur mignon mat. Prestet hon eus deoc'h hon domerez warlene, hag abalamour da se hon eus graet ar peurzom e miz Du. Ha bremañ e vefe lavaret ez omp termaji. Reiñ din an douar a zo din! Afronterezh eo, ha netra ken, mar fell deoc'h gouzout.

Ivan: Me 'zo ul laer eta! Me n'em eus morse laeret netra digant ar re all, dimezell. Ne bermetan da zen ebet tamall ac'hanon evel-se. (*O leuniañ ar werenn hag oc'h evañ buan dour*) Pradoù ar Groaz a zo din!

Natalia: N'eo ket gwir!

Ivan: Pradoù ar Groaz a zo din!

Natalia: N'eo ket gwir! Ha da ziskouez deoc'h n'eo ket gwir, e kasin di va mevelien da labourat feteiz.

Ivan: Petra 'lavarit?

Natalia: Kas a rin va mevelien da labourat e Pradoù ar Groaz feteiz!

Ivan: Me a gaso anezho er-maez!

Natalia: Gwelet e vo!

Ivan (*o stardañ e zorn war e galon*): Pradoù ar Groaz a zo din, kompren a rit? Din! Din! Din-me!

Natalia: Na griit ket evel-se. Bez' e c'hellit krial en ho ti mar karit. Met amañ ne vez ket graet.

Ivan: Gourlammat a ra va c'halon, Dimezell. Talmiñ a ra ar gwad em daouividig. Anez e komzfen c'hoazh kreñvoc'h, bezit asur. (*A-bouez e benn*) Pradoù ar Groaz a zo din!

Natalia: Dimp-ni int.

Ivan: N'int ket, din-me!

Natalia: Dimp-ni!

Ivan: Din-me!

Stepan a zeu tre.

Stepan: Petra 'c'hoarvez amañ? Perak emaoe'h o choual evel-se hotaou?

Natalia: Tad, mar plij, lavarit d'an aotrou-mañ da biv eo Pradoù ar Groaz, dimp-ni, pe dezhañ?

Stepan (*da Ivan*): Pradoù ar Groaz a zo dimp, va mignon.

Ivan: Pardonit din, Stepan. Ha penaos e vefent deoc'h? C'hwi da vihanañ a c'hallfe kaout un tammig skiant vat. Mamm-gozh va moereb he doa

prestet ar Pradoù-se da gouerien ho tad-kozh, da ziskouez hec'h anaoudegezh-vat, peogwir o doa labouret eviti. Gant an amzer, ar gouerien a oa deuet da gredif e oa ar Pradoù-se deoc'h. Ha neuze gant al lezennoù nevez...

Stepan: Ho tigarez, va mignon... Disoñjal a rit e oa bet diemglev. Hag abalamour da se ne veze ket paet ar feurm da vamm-gozh ho moereb gant ar gouerien. Ha bremañ, n'eus ket ur c'hi er barrez na oar ket eo ar Pradoù-se dimp. It da welout war ar c'hadastr mar karit.

Ivan: Prouiñ a c'hallan ez int din.

Stepan: N'oc'h ket evit prouifi netra, va den mat.

Ivan: Ober a rin!

Stepan: Arabat krial! Ne vez prouet netra o krial. N'em eus ket ezhomm eus ho madoù. Met ne roin ket deoc'h va re. Ha mar klaskit ober prosez, kentoc'h eget reiñ ar Pradoù-se deoc'h, e roin anezho d'ar gouerien.

Ivan: Digant piv hoc'h eus bet ar gwir da reiñ ar pezh a zo d'ar re all?

Stepan: Me 'oar petra am eus ar gwir d'ober. N'em eus ket da c'houlenn aotre diganeoc'h. Hag ouzhpenn, n'on ket kustum da gaout kentelioù, den yaouank. Me a zo div wech koshoc'h egedoc'h, hag ho pediñ a ran da gomz ouzhin hep mont en egar.

Ivan: Kemer a rit ac'hanon evit un diod? Lavarout a rit eo deoc'h va douar, ha n'em eus ket ar gwir da vont en egar, hag e rankan komz ouzhoc'h evel boaz! Amezeien vat ne reont ket evel ma rit. N'oc'h ket un amezeg. Skraper douar!

Stepan: Petra? Petra hoc'h eus lavaret?

Natalia: Tad, kasit ar vevelien da droc'hañ ar geot e Pradoù ar Groaz diouzhtu.

Stepan (da Ivan): Petra eo an dra-se hoc'h eus lavaret din, Aotrou?

Natalia: Ar Pradoù-se a zo dimp. Ha n'o lezin ket da vont ganeoc'h, na ne rin!

Ivan: Gwelet e vo! Me a brouo deoc'h ez int din.

Stepan: Dirak al lez-vern? It dirak al lez-vern, hag it buan! Me 'anavez ho seurt. Prozeziñ, setu ar pezh a blij deoc'h, rendaeler! Ho kerent a zo bet atav evel-se, atav prest da c'hervel an dud-a-lezenn.

Ivan: Lezit va c'herent! Tud onest int bet holl. N'eus ket unan anezho a vije bet biskoazh baret evit laerezh evel hoc'h eontr!

Stepan: N'eus ket unan eus ho kerent na oa ket trelatet e spered!

Natalia: Nann, n'eus ket unan!

Stepan: Ho tad-kozh a oa ul lonker. Hag ho moereb yaouank Olga a oa ur rederez, achapet diouzh ar gêr gant ur saver-tiez!

Ivan: Hag ho mamm a oa torted! (*O stardañ e galon gant e zorn*) Ar boanse em bruched... Ar gwad o sevel da'm penn!... Va Doue!... Ur banne dour din! (*Evañ a ra.*)

Stepan: Ho tad a oa ur c'hoarier hag ul loufrez!

Natalia: Hag ho moereb un teod fall eus ar gwashañ!

Ivan: Ar glizi a zo em gar gleiz!... Ha c'hwi n'oc'h nemet un toueller!... Aiou, va c'halon!... An holl a oar petra hoc'h eus graet a-raok ar votadeg... Burlutif a ra va daoulagad... Pelec'h emañ va zog?

Natalia: Gant ar vezh! Lavarout traoù e-giz-se! Dizonest eo! Vil eo!

Stepan: N'oc'h nemet un hailhon, ur pilpouz, un hubot!

Ivan: Setu amañ va zog... Va c'halon baour!... N'ouzon ket dre belec'h mont... Pelec'h emañ an nor?... Mervel a ran... N'on ket evit bale ken... (*Bale a ra etrezek an nor.*)

Stepan: Ha na lakait mui ho troad e-barzh va zi!

Natalia: It da glemm d'ar bamer! Gwelet e vo!

Ivan a ya kuit en ur drabidellañ.

Stepan: Kerzh gant an diaoul! (*Mont ha dont a ra, strafuilhet.*)

Natalia: Ha gwelet hoc'h eus e seurt ampouailh biskoazh? Komzit din eus amezeien!

Stepan: An hailhevod! Ar c'hañfard!

Natalia: An aneval! Fellout dezhañ laerezh douar ar re all, ha lavarout deoc'h traoù divalav war ar marc'had!

Stepan: Hag ar pabor-se, ar spontailh-se a gred dont amañ d'ober e c'houlenn!

Natalia: Peseurt goulenn?

Stepan: E c'houlenn-eured 'ta! Kaout c'hoant da zimeziñ ganit!

Natalia: Deuet eo amañ da c'houlenn dimeziñ ganin? Perak n'ho poa ket lavaret din a-raok?

Stepan: Abalamour da se e oa gwisket ken kran. Sapre leue!

Natalia: Dimeziñ ganin! Ur goulenn-eured! (*Kouezhañ a ra war ur gador ha stagañ da leñvañ*) It da gerc'hat anezhañ! It da gerc'hat anezhañ!

Stepan: Mont da gerc'hat piv?

Natalia: Buan! Buan! Degasit anezhañ en-dro! Emaon o vont da simplañ. (*Garmiñ a ra evel er-maez anezhi hec'h-unan.*)

Stepan: Petra 'zo? Petra 'c'hoarvez ganit? (*O stardañ e dal gant e zorn*) Me 'zo lakaet brav! Koulz din mont d'en em grougañ! Pennfollif a ran

gant an daou-se!

Natalia: Emaon o vervel! Degasit anezhañ en-dro!

Stepan: Mat! Mat! Mont a ran. N'eus ket ezhomm krial.

Stepan a ya kuit buan.

Natalia (hec'h-unan): Petra hon eus graet? Degasit anezhañ en-dro!
degasit anezhañ en-dro!

Stepan a zistro ken buan all.

Stepan: Emañ o tont en-dro. Me a garje e vije aet gant an diaoul. Te a gomzo gantañ. Me ne rin ket.

Natalia (o leñvañ): Degasit anezhañ en-dro.

Stepan: Emañ o tont en-dro, pa lavaran dit! Pebezh micher, va Doue, bezañ tad d'ur plac'h en oad da zimeziñ! Koulz e ve din troc'hafiñ va gouzoug diouzhtu. Ar paotr-se a zo bet bafouet, dismegañset, dibunet ur chapeledad vilonioù dezhañ. Ha gant piv?... Ganit-te!

Natalia: Nann, ganeoc'h-c'hwi!

Stepan: Me eo a zo kablus bremañ!

Stepan a ya kuit diouzh un tu. Ivan a zeu tre diouzh an tu all.

Ivan (skuizh-divi): Va c'halon o c'hourlammat... Aet gourt va divesker... Ur pistig em c'hostez...

Natalia: Pardonit dimp, Ivan. Aet omp un tammig prim... Soñj am eus bremañ: Pradoù ar Groaz a zo deoc'h.

Ivan: Va c'halon a lamm spontus... Pradoù ar Groaz a zo din... Talmiñ a ra spontus krec'hin va daoulagad.

Natalia: Ya, ar Pradoù-se a zo deoc'h... deoc'h... Azezit 'ta.

Azezañ a reont.

Ar gaou a oa ganimp.

Ivan: Ar wirionez eo a gont. Ne ran forzh eus an douar. Met derc'hel a ran d'ar wirionez.

Natalia: Ya, ar wirionez... Komzomp eus traoù all.

Ivan: Ha proufiñ a c'hallan ez int din. Mamm-gozh va moereb he doa roet da gouerien ho tad-kuñv ar gwir...

Natalia: Trawalc'h!... (A-gostez) N'ouzon ket kaer penaos digeriñ ar boulc'h... (Da Ivan) Ha mont e reot da chaseal dizale?

Ivan: Kerkent ha ma vo graet an eost, Natalia. Met n'hoc'h eus ket klevet ar c'heloù? Chafis fall am eus bet. Va c'hi Tailho — anaout a rit ma c'hi Tailho — a zo aet kamm.

Natalia: Pebezh domaj! Penaos eo c'hoarvezet?

Ivan: N'ouzon dare. Diempret e bav, pe marteze kroget ennañ gant chas

all. (O huanadiñ) Va c'hi gwellañ! Hag an arc'hant am eus dispignet d'e bremañ! Pemp roubl ha c'hwec'h-ugent!

Natalia: Re ger, Ivan!

Ivan: Ne gav ket din eo re ger. Me 'gav din eo marc'had-mat. Ur c'hi dispar!

Natalia: Va zad en deus bet e gi Fido evit pemp roubl ha pevar-ugent. Ha Fido a zo kalz gwelloc'h eget Tailho.

Ivan: Fido gwelloc'h eget Tailho! Fellout a ra deoc'h ober goap! (O c'hoarzhin) Fido gwelloc'h eget Tailho!

Natalia: Evel just eo gwelloc'h. Fido a zo yaouank, gwir eo, ha n'en deus ket c'hoazh desket mat e vicher. Met n'eus ket ur c'hi gwelloc'h egetañ er c'harter.

Ivan: Va digarezit, Natalia, met Fido a zo tougn e fri.

Natalia: Tougn! Ar wech kentañ eo ma klevan an dra-se!

Ivan: Hag a garvan-draoñ a zo re verr.

Natalia: Muzuliet hoc'h eus anezhi?

Ivan: Ur c'hi evel-se a c'hell redek. Met evit pegañ, ne dalvezo morse netra.

Natalia: Ur c'hi a ouenn vat eo Fido, ur c'hi a ouenn c'hlan. Ho Tailho a zo a ouenn vesker. Den ne c'hell divinout a be ouenn eo. Hag ouzhpenn eo kozh ha divalav, ha...

Ivan: Kozh eo marteze. Met ne rofen ket anezhañ evit pemp evel Fido. Biken! Tailho a zo ur c'hi!... Poan gollet e ve tabutal pelloc'h... Chas evel Fido a vez kavet e pep kom. Talvezout a ra... lakaomp pemp roubl warn-ugent. Ha c'hoazh e vefe re ger.

Natalia: N'ouzon ket petra a zo krog ennoc'h hiziv, Ivan. Dislavarout atav ar re all! Da gentañ, reiñ da grediñ eo deoc'h Pradoù ar Groaz. Ha bremañ reiñ da grediñ eo Tailho gwelloc'h eget Fido. Ne blij ket din tud a lavar ar pezh na gredont ket. Gouzout a ouzoc'h ervat eo Fido kant gwech gwelloc'h eget ho kozh Tailho. Perak lavarout ar c'hontrol?

Ivan: Kompren a ran, Natalia, e kemerit ac'hanon evit un diod pe un dall. Ho Fido a zo tougn e fri.

Natalia: N'eo ket!

Ivan: Tougn eo.

Natalia (a-bouez he fenn): N'eo ket!

Ivan: Kriit 'ta, Dimezell!

Natalia: Ha c'hwi, lavarit sotonioù! Spontus eo! Ho Tailho a zo mat da

lazhañ! N'eo mann e-kichen Fido!

Ivan: Pardonit din. N'on ket evit arguziñ... Va c'halon...

Natalia: Atav eo ar chaseourien fall a vez prest da dabutal pa vez anv a chase.

Ivan: Dimezell, tavit, mar plij... Emañ va c'halon o tarzhañ em bruched... (*A-bouez e benn*) Tavit!

Natalia: Ne davin ket, keit ha n'ho po ket anzavet eo Fido kant gwech gwelloc'h eget Tailho.

Ivan: Kant gwech gwashoc'h eo! Ho Fido a zo mat d'ober ur c'hagn en douflez!... O va fenn!... O va daoulagad!... O va c'hostez!...

Natalia: Ne vo ket ezhomm da deurel ho Tailho en douflez. Eno emañ dija, hanter varv!

Ivan: Roit peoc'h... Tarzhañ a ra va c'halon!

Natalia: N'ho po peoc'h ebet diganin!

Stepan a zeu tre.

Stepan: Petra 'zo c'hoazh?

Natalia: Tad, lavarit dimp, hep distro, war ho ker a enor: pehini eo ar gwellañ, hor Fido, pe e Dailho?

Ivan: Stepan, mar plij, ur goulenn hepken: ha tougn eo fri Fido?

Stepan: Ha petra 'ra se? Tougn pe nann, n'eus ket gwelloc'h ki egetañ er c'harter.

Ivan: Nemet Tailho! Tailho a zo gwelloc'h c'hoazh. Responit, war hoc'h enor.

Stepan: Arabat koll penn... Sellomp ouzh an traoù evel m'emaint... Ho Tailho, evel just, n'eo ket ur c'hi fall... A ouenn rik eo, korfet-mat, krefiv e bavioù. Met kozh eo.

Ivan: Pardonit din... Gourlammat a ra va c'halon... Ya, sellomp ouzh an traoù evel m'emaint... Soñj hoc'h eus marteze, p'edomp o chaseal gant ar c'hont, Tailho a rede er penn a-raok gant e gi Min-Du, hag ho Fido a oa pell war o lerc'h.

Stepan: Chomet oa war-lerc'h peogwir en doa bet un taol foet gant gwenaer ar c'hont.

Ivan: Meritet en doa. Edo ar chas all o redek war-lerc'h al louam, ha Fido a oa aet da hegasin an defived.

Stepan: N'eo ket gwir!... Va mignon ker, c'hwi 'oar ez on prim da gounnariñ. Arabat dimp tabutal. Un taol foet en doa bet Fido gant gwenaer ar c'hont, abalamour ma'z eus tud o deus avi ouzh chas ar re all... Ya, an dud n'int ket evit gouzañv chas ar re all. Ha c'hwi da

gentañ, Aotrou, a zo evel-se. Ya, kercent ha ma welit ur c'hi gwelloc'h eget ho Tailho, e kavit abeg ennañ... Soñj am eus...

Ivan: Soñj am eus ivez.

Stepan (ouzh e zrevezañ): Soñj am eus ivez! Hag eus petra hoc'h eus soñj?

Ivan: Soñj am eus... eo seizet va gar.

Natalia (ouzh e zrevezañ): Seizet va gar!... C'hwi 'zo ur chaseour dispar avat! Gwell e ve deoc'h bezañ war ho kwele eget mont da bakañ lem. (*Ouzh e zrevezañ*) Seizet va gar!

Stepan: Da lavarout ar wirionez, n'oc'h ket graet da chaseal. Gant ho kalon atav o c'hourlammat en ho pruched, e tlefec'h chom er gêr azezet war ho kador-vrec'h, e-lec'h bezañ stofiset war gein ur marc'h. O, me 'oar perak ez it da chaseal. Evit arguziñ gant ar re all, evit abegout chas ar re all... Prim on da gounnariñ. Dre se ne dabutin ket... Ul lastez chaseour oc'h, setu holl.

Ivan: Ha c'hwi 'zo ur brav a chaseour ivez! Mont a rit da chaseal evit bezañ mignon gant ar c'hont, evit lubaniñ, evit dispenn brud ar re all... Aiou va c'halon!... Ur c'havailher oc'h!

Stepan: Kavailher, me! Serrit ho peg!

Ivan: Kavailher!

Stepan: Gogez! Dilamprek!

Ivan: Tostenner! Klufan!

Stepan: Tavit! Ez an da gemer va fuzuilh evit ho lazhañ evel ur glujar! Teod lous!

Ivan: An holl a oar e vezec'h fustet gant ho kwreg... O va gar!... Va fenn!... Me 'wel stered o parañ!... Emaon tost da gouezhañ!... Kouezhañ a ran!

Stepan: Hag ho matezh a ra al lezenn en ho ti!

Ivan: O!... Va skoaz!... Va c'halon!... Mervel a ran! (*Kouezhañ a ra en ur gador-vrec'h*) It da gerc'hat ar medisin! (*Semplan a ra.*)

Stepan: Amboubal! Inosant! Leue!

Natalia: Hemañ a zo ur gwaz avat! (*Tostaat a ra ouzh ar gador-vrec'h m'emañ astennet Ivan a-stok e gein enni*) Tad! Petra 'c'hoarvez? Sellit, tad, sellit 'ta! (*O krial*) Ivan! Marv eo!

Stepan (oc'h ober goap): O!... va skoaz!... Va c'halon!... Mervel a ran!

Natalia: Marv eo! (*Kregiñ a ra e milgin chupenn Ivan da hejañ anezhañ*) Ivan! Ivan! Petra hon eus graet! Marv eo! (*Kouezhañ a ra en ur gador-vrec'h*) Ur medisin! Ur medisin! (*Difronkañ a ra ha c'hoarzhin evel*)

un diskiantez.)

Stepan: Petra 'zo? Petra 'c'hoarvez? Petra 'fell dit?

Natalia (o leñvañ): Marv eo!... Marv!

Stepan: Piv 'zo marv? (O welout Ivan) Marv eo! Va Doue! Dour dezhañ! (Diskenn a ra dour en ur werenn, a laka ouzh muzelloù Ivan) Evit! Evit 'ta!... N'ev ket... Marv eo... Pebezh dichañs evidon! Perak n'on ket en em lazhet? Laosket un tenn pistolenn e-barzh va fenn pe droc'h et va gouzoug gant ur gontell? Ro din ur gontell! Ro din ur bistolenn!

Ivan a fiñv un disterig.

Distreiñ a ra ar vuhez ennañ... Evit ur banne dour, va faotr.

Ivan: Stered dirak va daoulagad... Ur vrumenn... Pelec'h emañ?

Stepan: Emaoc'h o vont da zimeziñ, ar c'hentañ gwellañ, ha neuze mont da sutal... Hi a lavar ya. (Lakaat a ra dorn Natalia e dorn Ivan)

Ya a lavar. Reiñ a ran deoc'h va bennozh, va bugale... Hag it kuit!

Ivan: Petra? (O sevel) Piv?

Stepan: Pokit dezhi. Hag it gant an diaoul!

Natalia: N'eo ket marv! Ya, me a lavar ya.

Stepan: Pokit an eil d'egile.

Ivan: Pokat da biv? (Pokat a ra da Natalia) Pebezh eurvad!... Petra am eus graet?... Kompren a ran... Gourlammat a ra va c'halon... gant al levenez, Natalia! (Pokat a ra d'he dorn) Va gar a zo aet gour.

Natalia: Me a zo laouen ivez.

Stepan: Pebezh disamm!

Natalia: Memes tra, anzavit n'eo ket par ho ki Tailho d'hor c'hi Fido.

Ivan: Fido a zo gwelloc'h.

Natalia: N'eo ket gwir!

Stepan: Tabutal a reont dija evel daou wir bried. (O huchal er-maez) Hê! Champagn amañ!

Ivan: Tailho a zo gwelloc'h!

Natalia: Fido a zo gwelloc'h... Gwelloc'h... Gwelloc'h!

Stepan (o krial kreñvoc'h egeto): Champagn! Champagn!

[Mar karer] Ur servijer a zeu tre, o tougen ur bladenn warni ur voutailhad champagn ha gwerennoù.

Embannet evit ar wech kentañ en *Ar Bed Keltiek*, miz Genver 1966

C'HOARIVA

bet savet war-eeun gant Roparz Hemon

— embannet gant Al Liamm —

+ **C'hoariva I** [212 pajenn, 45 lur]

(Lina ; Un den a netra ; An tan e ti Kernaspreden ; Dour ar C'halvar ; Meurlarjez ; Fest al leue lart ; Ur bugel a zo ganet ; Roperzh Emmet ; Biniouer ar glav hag an heol)

+ **C'hoariva II** [246 pajenn, 47 lur]

(Ar bank Oaled ; An dormad plouz ; An ael aour ; Perig ha Gwignolig ; Ar gweladenner eus ar stered ; Valerian ha Valerian ; An Intañvez Barv Glas ; An Diaoul da Ael-Mat ; Bisig, kazh markiz Landeme)

Al levrioù-mañ zo da vezañ kavet er stalioù-levrioù mat ha dre lizher e ti an Dll J. Queillé, 20 rue du Petit-Trotieux 22200 Gwengamp

